



G U E R Z A N H I L L I D A

*C'huec'h ugent den beuzet e kichen Sant-Malo,
En ho mesk pevar ugent Breton dez Leon.*



An heur-waleur siouaz a zo
Atao, bepred o vont en dro
Hag o skei bemdez heb paouez
N'eur c'horn bennag war an dud kez.

Ne glever mui o komzeal
Nemet euz a zarvoudou fall
Euz ar gwal heurion a erru
Atao bemdez en tu pe du.

Ar vech-ma siouaz tud hor bro
Zo skoet heb truez d'ho zro
Gant eun darvoud ar spountussa
A zo bet guelet dre ama.

D'an driouec'h devez a viz Du
E kreiz an noz tenval ha du
Al lestr *Hilda* tont dez Bro-Zaoz
Zo bet beuzet e-kreiz an noz.

Ha warnez-hi kant tregont den
Akuipaj ha beachourien
Beuzet holl siouaz nemet c'houec'h
Heb sikour ebet dez neb lec'h.

N'ho mesk pevar ugent Brezad
Euz Kastel-Pol ha Plouescat,
Euz Kleder, Treflez ha Rosko
Hag ar paressiou tro war-dro.

Ar re-man oa kustum bep bloaz
Da vont a vandennadou braz
Da Vro-Zaoz da verza ognon
A zo kalz e kostez Leon.

Hag e oant o tistrei d'ar ger
Laouen a galoun ha seder,
Mal braz warnez-ho da velet
Ho zud hag ho bro benniget.

Ne zonzjen ket siouaz dez-ho
Oant vont var eon d'ar maro
Ha ne veljont mui ho zud kez
Araok ma golfont ho buhez !

Partiet d'ar guener d'an noz
Euz porz Southampton, euz Bro-Zaoz
Hint gle beza e Sant-Malo
D'an de warlerc'h gant al lano.

Mez d'ar zadorn vintin siouaz
Eun avel foll a zirollaz !
En eur zewel ar goagennou
Uz d'al lestr evel menesiou !

Houman e oa vel eur bluenn
Tol ha distol gant ar froudenn
Euz beg an eil goagen d'eben
Vel pa nije stur ebet ken.

Na re nemet bransigellet
Bepred war poent beza lounket
Ken kre all c'houeze an avel
Diwar zu douar Breiz-Izel.

Derc'hel mad reiz goulskoude
Penn d'an diroll epad an de,
Mes siouaz an noz a dosta
Hag ar mor a ia war voassa !

Ouspen-ze tre ma tasteaz
An danger ivez a greskaz
Abalamour d'ar c'herek zo
En dro da borz-mor Sant-Malo.

Ne oa mui evit douari
D'an heuriou oa gleet dezhi
O veza bet dalc'het re bell
E kreiz ar mor gant an avel.

Hag an noz teuaz warnezhi,
Eun noz tenval e pehini
Ar glao, ar grizil, ar c'hrazac'h
A re ken du hag en eur zarc'h.

Ne oant ket 'vit guelet netra
En dro dezho 'vit ho henchu,
Sklerijen na tour-tan ebet
Vit gouzout dre belec'h monet !

Souden, koin al lestr a stokaz
Euz eur garrek gant eun trouz braz,
Hag al lestr a c'harp n'eun tol krenn
En eur greua 'vel eun delienn !

Toulet siouaz gant ar roc'h-vor,
Ebarz n'he c'hreiz anter zigor,
An dour-mor a zaillaz ractal
War an dud kez en eur iudal !

Ar c'habiten laraz neuze :
« Na spoutet ket en han' Doue,
Distaget ar bagou bihan
Ha tec'het warnezhio buan ! »

N'oa ket echuet he gomzou
Oant goloet gant ar goagennou !
Hag tud, lestr, ha bagou ieaz
Ractal da wouelek ar mor braz !

Eun neubent c'hellaz gouskoude
Kemer eur vag, mez siouaz d'he,
Pe du monet, pe goste trei
Evit gallout n'em zavetei !

Rag ouспен ma ne velont ket
N'ouzont doare na c'hent ebet
Dre greiz ar mor hag araok pell
Siouaz dezho renkont mervel !

Eun neubent all bignaz n'eur bern
Er beg huella deuz eur wern
Pehini jome mez an dour
An esper iaffer d'ho zikour.

Mez an amzer a oa ken kri
Ken a skorne ho izili,
Hag kalz a gonezaz raog an de
Er mor an eil goud egile !

Lod all varvaz skornet, sklaset,
Hag jom à istribill bepred
Vel pa vijont bet en bue,
Na pebeuz maro didrue !

Antronoz vintin lestr *Ada*,
O vont da Vro-Zaoz dre ama,
Ho guel n'eur blokad uz ar mour
Ha gas tud evit ho zikour !

Mez pebeuz heuz ha pebeuz spont
N'ho deuz ket siouaz pa velont
E oa maro kalz anezho
Hag int a istribill atao !

C'houec'h hebken e oa he buhe :
Louis Rozec deuz Plouzevede,
Pol-Mari Penn, Jean-Louis Mouter
Ha Tanguy an Aot deuz Kleder.

Ollier Karoff deuz Rosko
Hag eur Zaoz, Grunslar he hano,
Pemp Breizad, hãg an diveza
Kenta taner var an *Hilda*.

An *Ada* o c'hassaz ractal
Da Zant-Malo d'an hospital,
Ha ganthi neuze oa klevet
Ar c'helou truezuz meurbet !

Al lestr *Hilda* korf ha madou
Beuzet war reer an Doriou
E kichen pors-mor Sant-Malo
Gant kant tregont den pe war-dro !

Deuz Sant-Malo ieaz neuze
Bagou er mor e peb koste
Da velet hen nijen kavet
Lod euz korfou ar re veuzet.

Mez pouezet gant avel gontrol
Ha gant ar goagennou diroll,
Ar c'horfou beuzet a ieaz
Pelloc'h, war-zu douar Sant-Cast.

Neuze ar mor evel skuizet
Euz ho derc'hel n'he zour sklaset
Ho distaolaz vel gant kounar
A bakadou war an douar !

Kri e oa an den na vouele
E Sant-Cast an deveziou-ze,
O velet an iliz karget
Digant korfou ar re veuzet !

O velet an iliz karget
Hag eur pez toul kreiz ar veret
Vit lakat ar re na vijen
Ket goulennet gant ho c'heren !

Kri ivez neb oa ket mantret,
O velet tud ar re veuzet
O n'em strinka war ar c'horfou
Hag ho guelc'hen gant ho daelou !

Krioc'h ve c'hoaz neb dremen-fe
Dre vro Leon ma ne raffe
Eur zel a dru deuz ar paour-kez
Neuz mui den souten he vuhez !

Rag ped ha ped all n'ho deuz ket
Kollet eur mab, pe eur pried
Hag n'en doa siouaz nemet-ho
Evit gounit bara dezho !

KOLAÏK P.

Tous droits réservés.

